

(1)

An daou den iaouank.

Mar galan goud ar fesson a renkan komposi  
 Eur chanson pe ar c'himiad ervez va fantasi;  
 Zo gret da zaou den iaouank dud a kondition  
 Estimet er ho Fares gant an dud a fesson.

Ne voant nemet eunek vlas pa int bed commenset  
 A dre ol ne nem kavent en hent gant ho loennet.  
 An hini an diche ar goassa he gile n' sikoure  
 Ber e kaffchent an amser o tremen ho bue.

Pa voant eunek blaz achu e deont dar katekis  
 En eum euliont a dare evel ma voa ho gis,  
 Petek ober ho zri fask en toues ar bugale  
 Beb bloaz e kreske eno merk chaden an amitie.

Pi ho deus achuet ho fasko en touez ar bugale  
 Ar e zint-hi kommenset da roula ho iaouankis  
 He digas a re dar gher deus a beb assamble  
 Evel daou den unisset en illis gant Doue.

(2)

Ho zud pi ho deves goelet merk ho Fidelite,  
 ho chonjalz o separi an eil deus e Guile,  
 Ar plac'h a ia dar 'gouent, peden leo diontan  
 Chonjal ankonac'haje beza fidel dezan.

Na pa voant dispartiet an eil deus e guile  
 ho zud na chonje ked de o diche ar Finesse.  
 Ar goas a ouie skriva, a kasse liserou  
 Eur weac'h ar sizun rekis da klevet he kelou.

Pa zeo echuet an termen <sup>eo</sup> deud ar Plac'h er mes  
 No devoa ked ar pouvoir de ober Leannes  
 en eum euillont adare evel an eur gentan  
 Gharantes ar brassa noa den vouit he distruja.

En ~~enn~~ euillet int bed petek eur bloa varnugent,  
 Ken a deuas an urson da tena daer billet  
 Neuse ho deus renoncet d'ho plijadurussou  
 ho deua bed assembles dre an assembleu.

Pa entree an den iaduant er kambr eruit tena  
 he santas e ol vemprou o kommanç da krena.  
 Chonjal a deuche gantan an numero izel  
 Ag a rankche separi deus e vestres fidel.

Assten a re e zorn pa voa deuet e Renk  
 Hag e digassai gantan an numero uquent  
 Setu mantret he galon a beuzet en glahar  
 Ken a garche e viche ed divar an douar.

(3)

Pa voa annoncet derzi gant e kamarado  
 Pera en derra tenet ha pe sort numero  
 he lavar a voes huel arok ma partiche  
 E velche e Liens ag en lahat en he bez.

Dar sul arok ma parti int bed e neum kavet  
 Dont deus ar gousperou int e neum rankontret  
 An daelou ho daoulagat a c'hlepie' ho dillat  
 En korn eur c'hleun arretet d'ober ho c'himmiad.

A baoue horn bugaleac'h va mestrezik fidel  
 He chonje voan choazet gant Doue eternal  
 E voam om dasu e vera er memes sentiment  
 Rag me moa emerzi speret pareillamant

en an' Doue emerzan pa renkan partial  
 Evid merk a amitie ouzoc'h e c'houlenan  
 Ar mouchouer zo ganec'h o serc'ha ho daelou  
 Mar gallan sellet ourtan petek fin va dechou.

Demeus a kreiz va c'halon e mei va mignon ker  
 Hag e c'hastenan va dorn da rei ar mouchouer  
 Lakint-hi en ho godel a dalc'hit mad dezan  
 Mar no pe soulajamant ho sellet dioutan.

(4)

E nem konsolet va mignon ia keit a ma vest

Ne vo ked hir o konje deus ar liou a zouget  
 A ben pemzek dez aman ag an deiz a hirie  
 E vo pepini ha hanomp a repos en or be.

Kredi a ran emezan ar feiz a leveret  
 Raktal a ma harvuin er ger a San-Briec  
 Me kemero eur billet da vont dan hospital  
 A c'hane vin transportet a douget dan douar.

A ben peder derves ma zeo bet partiet  
 E zeo maro e mestrez bars er ger a Loperék  
 A ben daou zervez goude e c'hann ar c'hellou  
 E zeo maro e mignon doue d'ho fardounno.

—